

— 4 —

Rac se oll, mar am c'hredi, prenit peb a chanson,
Ha capit nos ha mintin deus a greiz ho calou.

Pa verc'h e creiz ho labour, occupet hed an de,
Lezit ho corn ha canit ar chanson vrao neuze ;
Nebeutoc'h e coust certen ha yac'hussoc'h ouspen
Cana eguet n'eo fumi nac eva gigoden.

Elec'h ma zeo imprimet an diou chanson gos-mâ,
E vezoz cavet unan evit bep deiz ar bloa ;
Ha ma na vez qet avoalc'h, e vezoz ajoutet,
Evit laqat joaüstet etouez ar Vretonet.

D'an nos, pa ve assamblet ar famill goude coan,
Azeet en dro d'an ealet e qichennic an iâo,
Canit pepini d'e dro ur chanson vrao neuze,
Ha m'en assur e couscot calz guelloc'h goude se.

FIN.

575

CHANSON CUPIDON.

Var un ton anavezet mat.


TOOSTAIT, tud yaouanq, da glêvet ur chanson
 A nevez compost var sujet Cupidon,
 A me a gonto déc'h darn demeus an effejou
 A brodu peurvuia ebars er galonou.

— 5 —

Ne oun qet eus petra dont d'er gomparachi ;
 N'eo nep lec'h ha partout gouscoude ec'h éri,
 Nemet ous an avel, a so oll penetrant,
 En so er memes tra etouez an dud yaouanq.

Me zo pet pell amzer e clasq dioüal ouniâ ;
 P'eu deus va surprenet, emeus renget plega,
 An objet a garân a verit qementse ;
 N'em bije quez ebet, m'hor bijemp liberte.

Mes allas ! calz a boan am bo da anduri,
 Qent m'am bo ar boneur d'allout e fossedi,
 Mes e creiz va foaniou e teuan da gompreñ,
 Etouez a brassa drein vez ar gaera rosen.

Pa voan o studia, m'en boa bet ur guentel
 Digant ur mignoo dîo hac am gare fidel,
 Da zioüal va c'halon eus an amouroustet,
 Pe bijen plijadur n'am bije var ar bed.

Ebars en amzer ze ne allen qet credi
 E vije'n amitie capabl d'am arêti ;
 Hac a greiz va c'halon me a c'hoarze neuze
 Da guement a zougue chanen an amitie.

Bremâ e velân sclér, nespèt d'am imprudanç,
 Oun forçet da gredi dîe va experianç :
 Venus na vanq james da veza trionfant :
 Ret eo obeissa, an natur a gommard.

Ma velfes ac'hanôñ bremâ, va c'hamarad.
 Va c'halon languissant, beuze va daoulagad,
 Anconac'het ganén an avis saluter
 A poa bet roet dîo er guer a Landreguer.

— 6 —

A boan e hall va dorn cundue va fluen,
 Va speret so troublet ha caget a anqen,
 Da avis saluter ne yel qet eus va speret,
 Mes siouas d'am c'halon, ne meus qet e heuillet.

Vel ur c'haret fleur goloet a louzou.
 Eo carguet va c'halon eus a huauadou :
 Chagrin continual, abreuvet em glac'har,
 Evel an durzunel pa ve collet he-far.

N'en deus den var bed na ne vezoiqen,
 A oufe expliq'a na genebeut compren
 Degrer an amitie, pa ve pârfetamant
 Unisset a galon entre daou zen yaouanq.

Doctoret a Sorbon hac a Filosofi,
 Rheto: iq, Seminer hac a Theolo: i,
 Oll sqient an natur lajet tout en unan
 Da ober an dra-ze a ve tou: re vian.

Va c'halon re dener n'ont qet hac en allo
 Hep ranna daou aster o clevet ur c'helo :
 Lavaret e zeus dîn gant daru va mignonet,
 Emâ ar goal deodou oc'h ober ur boget.

Da rîi dîn va-unan ha d'am mestrez da choas ;
 Dont d'en em separi pe gaoat evit partach
 Eur boget o deus grêt eus a beder fleuten :
 Chagrin, malanconi, poan-speret hac anqen.

Arça, teod miserabl ha neo qet poent dide
 Lezel pelloch en peoc'h hac en tranquilité
 An ded yaouanq er vro da tén o yaouanqis,
 Ha d'en em garout ebarts en honestis ?

— 7 —

Partout elec'h ma zes te laca an aougen ;
 Goas out ebars er vro egoet na ze ar vocen ;
 Hac ar c'homzou poezus a roes da bepini
 Zo capabl da laqat ar veio d'en em zébri.

Entre tad ha buguel, etre ar breur, ar c'hoar,
 Etre ar priedjou te laqa ar glac'har ;
 Mestrou, domestiqt, querent ha mignonet,
 A greis o flijadur te heus o zeparet.

Cléo ar Speret-Santel o parlant er Scritur,
 E vezò milliguet ar goal deod dinatur,
 Dre ma laqa malis ha separation
 Etre tud a veve ebars en union.

Cléo Sant Yan o parlant en e Apocalips,
 Sant Gregor ha Sant Paul, Doctoret an Iis,
 A lavar en devo ar goal dêod da bartach
 A lenn-oat infernal carguet eus a attrach.

Ha c'houi, tud curius, a dremen vit tud fur,
 O clêvet goal dêodou, c'houi guemer plijadur ;
 Lennit pis ar Scritur hac e velfot merget
 En em rentit coupabl eus ar memes pec'het.

Selaouit Sant Bernard, an abat admirabl,
 Pe Sant Louis, Roue Franç oc'h instrui e vab ;
 Pa zifenne outan na roje odianç
 Da zroug prezec a zen ebars en e brezanç.

Evit conclusion, deoc'h-u, tud curius,
 Ho pedan assambles gant an teod bilimus,
 Da guemer va chanson bremào evit reglen :
 Sotoc'h eguest an den avichou er c'holen.

— 8 —

Qent eguet fioissa, d'an objet a garàñ,
 Dezi ec'h adressin va c'homzou divezàn :
 Bezit fidel d'ho qer, me vezo d'am binij,
 Birviqen goal deodou na ell hor separi.

Ferm evel ur garec er mor ous an tourmant,
 Mar bezit dìn fidel, me zisquelo patant
 En em garimb bepret hon daou a vir galon,
 Desquet d'ar goal déodou a tén dre ar c'hanton.

Ar men fondamental demeus an amitié
 Hon unisso hou daou dre ar c'hraç a Zoue.
 Speret aoüalc'h oc'h eus evit allout credi
 Ne zeus victor abet na renquer combati.

FIN



E Montroulez, eus a Imprimeri LANOE.